

AR GOÑSULAD HAG AN IMPALAERIEZH (1799-1815)

Peseurt treuzfurmadurioù a voe e Frañs da vare ar C'hoñsulad ?

Edan an Directoire e oa Frañs en arvar : nemet un arme a c'hell asuriñ ar stabilted : ar jeneral Bonaparte a gemer ar galloud.

Anv : **BONAPARTE**

Raganv : Napoleon

lesanvet :

+penaos ? : « Le petit caporal. »

blezad ganedigezh 1769

marv :1821

Orin sokial ar familh : noblañs vihan __e Korsika__

Studioù /micherioù : studioù er skol vilourel Brienne hag e Pariz__

Buhez politikel : General, kentañ Koñsul (1799-1804) hag impalaer ar C'hallaoued(1804-1815).

Karakter ha/pe mennozhioù : gouez, sioul, leun a enor, gloar, strategour, diplomat barrek, politkour fin, entanet get an istor, ar skridoù, filosofiezh ha politikerezh peurgetket,_____

Darvoudoù istorel pouezus ? taol diskar-Stad d'an 9 a viz Du 1799(18 Brumaire), trec'h e Austerlitz (1805), e Iéna (1806), e Friedland (1807) hag e Wagram (1809) , sakret impalaer d'an 2 a viz Kerzu 1804, trec'het e Waterloo e 1815 enep d'ar Saozon _____

D) Galloud un den

A) Bonaparte : Koñsul Kentañ

diell 3 pajenn 93

Adlârit pegoulz ha penaos en deus kemeret ar galloud Bonaparte .taol diskar-Stad (18/11/1799).

Piv a zo àr an oberenn ?...Bonaparte àr ul leurenn hag a-dal tud é touiñ.....

Termenit ar ger « Koñsul » ger implijet da vare Roma heñvel doc'h Kaezar

Dielfenniñ an daolenn :

Pet koñsul e vez gwelet ? e men e ya ar sell? Petra eo emzalc'h an daou goñsul ? Perak ?

3 c'hoñsul a zo. Fin eo Bonaparte, ne faot ket diskouez emañ e-unan. Ar sell a zo troet àr e du .Lec'hiet eo Bonaparte un tammig dirak a re arall ar pezh a ziskouez en dus Bonaparte ar plas pouezusañ, emañ getañ ar galloud seveniñ. Oc'hpenn e 1802 e teu da vout **Koñsul da viken** da heul ur boblvotadeg (ur votateg get ar bobl à ur goulenn savet get ar gouarnamant).....

Piv eo ar pevar den é touiñ ? peseurt galloud e reprezentant ?

Ar 4 prezidant ar vodadenn. Repezantiñ a rant ar galloud lezenniñ ha Bonaparte en deus anvet 4 a-benn ren ar muiañ.

Get piv emaint diskouezet get ar biz ? dielfennit ho respont

Diskouezet int get Bonaparte hag eñ a ra un sin get an dorn kleiz evit asantiñ al le. Izeloc'h int evitañ .

Peseurt elfennoù ag an daolenn a ro referañs d'an Dispac'h?

Ar gouriz glas, gwenn ha ruz, hag ar gokardenn(ar seizenn skoulmet en e zorn dehoù)

Penaos dielfenniñ an daolenn-mañ ?

Un daolenn propaganda eo, emañ en enor Napoleon

klozadur : Sevel a ra Napoleon ur renad aotrouniek

B) Bonaparte : Impalaer diell 2,4 pajenn 94-95.

Kinniguit an diell : Taolenn mentoù bras geti, savet get David. Taolenn propaganda. Ret eo dere'hel soñj doc'h un darvoud istorel.

E men e veze lidet sakr rouaned Frañs ? e men e oa bet hini Bonaparte?

E Reims e vez lidet met amañ emañ e Notre-Dame e Pariz

Peseurt penn bras an Iliz a gemere perzh er lid ? ar pab Pie VII

Peseurt arouezioù galloud ar vonarkiezh a vez gwelet war an daolenn

Kurunenn an impalaer, ar vazh-roue, ar voull-douar get ur groaz, dorn-justis..

Penaos e oa gwisket Napoleon da zegas soñj ag an impalaerien Roma ?

Kurunenn lore ha toj an impalaerien roma

.Get piv e vez kurunennet an impalaer? Displegit ar frazenn islinennet

En em guruniñ a ra Napoleon e-unan. Ar pab a zo amañ èl un arvestour ar pezh a ziskouez emañ an impalaer a-us d'ar pab.

II) Penaos e ren Napoleon Iañ war Frañs ?

A) Ur galloud aotrouniek

E-barzh an destenn 1A, islinennit dleadou ar C'hallaoued da geñver an Impalaer.

Hervez an destenn 1B, petra eo karg Fouché ? Petra a urzh Napoleon dezhañ ?

Ministr ar polis eo Fouche. Karget d'ar sañsuriñ ar c'heleier

Hervez Chateaubriand, penaos e ren Napoleon ?

El un tyran.

Doc. 1 Le contrôle de la population

A. Les devoirs des Français envers Napoléon I^{er}

« [...] Nous devons à Napoléon I^{er}, notre Empereur, l'amour, le respect, l'obéissance, la fidélité, le service militaire, les tributs ordonnés pour la conservation et la défense de l'Empire et de son trône [...]. »

Catéchisme impérial à destination des jeunes Français (extrait), 1806.

B. La censure de la presse

« Monsieur Fouché, [...] réprimez un peu plus les journaux, faites-y mettre de bons articles, faites comprendre à leurs rédacteurs [...] que le temps de la Révolution est fini, et [...] que je ne souffrirai jamais que les journaux disent ou fassent rien contre mes intérêts. »

Lettre de Napoléon au ministre de la Police (extrait), 22 avril 1804.

C. Un opposant en exil contre Napoléon I^{er}

« Nous ne voulons plus de ta conscription, de ta police, de ta censure, de tes fusillades nocturnes, de ta tyrannie. »

Chateaubriand, De Buonaparte et des Bourbons (extrait), 1814.

B) Bonaparte a lakaa en-dro ar peoc'h ha pinvidigezh e Frañs : petra eo an treuzfurmadurioù a voe e Frañs edan Bonaparte ? Dielloù s 1, 2, 4, 5 p 92-93:

Napoleon hag e bolitikerezh a zivroc'hiñ broadel

Peseurt divizoù kemeret get ar C'hoñsul Kentañ evit divroc'hiñ ar C'hallaoued ?



Penaos e reas Napoleon evit kaout souten an holl ?

Abaoe an Dispac'h gall

Obererezhioù Napoleon

Kuitaet o deus an noblañs Frañs get aon evit o buhez hag o madoù.

Edan an Directoire, an dispac'hourien a zo skarzhet get aon da welet en-dro ar Spont.

N'eo ket ken anavezet ar relijion katolik

Ar veleien e vez anvet evel kargidi ar Stad ha paet geti.



Torret eo an dreistwarioù ha gwerzhet madoù ar c'hloer.

Aotreiñ a reas Napoleon **distro an nobled** divroet da zont en-dro hag an dispac'hourien hag a ginnigas dezhe postoù kargidi da dud bet roueelourien pe bet dispac'hourien.

E 1801, e sinas Napoleon get ar pab ar **C'honkordad** a anavez ar relijion katolik evel relijion ar lodenn vras ag ar C'hallaoued.

Gopret e voe ar veleien hag an eskibien get ar stad met asantiñ a reas Napoleon e vehent lakaet e karg get ar pab.

Ar gwirioù a oa tapet e 1789 a voe dalc'het hag e lakaas da sevel ar C'hod sivil e 1804 a gadarnae ar frankizoù hiniennel, an ingalded dirak ar lezenn hag ar gwir da berc'henniñ.

Reformoù	Palioù ar reformoù
<p><u>Ar C'hod sivil</u> Diell 4</p> 	<p>Lakaat a ra Napoleon da sevel ar C'hod sivil a resisaa gwirioù pep hini ha a gadarna ingalded an holl dirak al lezenn(1804). Pennadoù zo e vez kavet e barzh Disklêriadur gwirioù mab-den hag ar c'heodedad</p> <p>.....</p> <p>.....</p> <p>.....</p> <p>.....</p> <p>.....</p>
<p><u>Al lur germinal</u> Diell 5</p> 	<p>Reprezantet eo el Kaezar(troc'h blev) hag enskrivet lañ Koñsul. En tu gin ez eus Republik gall, An XI. Germinal a dalv miz an deziadur dispac'hourel Stabilizet e voe an ekonomiezh hag implijet e vo ar moneiz el un arouez propaganda.(1803).....</p> <p>.....</p> <p>.....</p> <p>.....</p>
<p><u>Ar Légion d'honneur</u> Diell 5</p>	<p>Medailhenn roet d'ar re o deus servijet ar gwellañ ar Stad. Liseoù-Stad : stummiñ kargidi ar Stad , tud sentus ha barrek : desket e vez ar galleg, al latin, ar matematikoù, teknikoù brezeliñ.....</p> <p>.....</p>
<p><u>Ar brefeted</u> Diell 2</p>	<p>A reprezant ar Stad en departamantoù,</p>


III) Penaos e oa mestroniet Europa get Napoleon Iañ? P 104

A. Aloubadeg Europa

War ar gartenn, skrivit anvioù an emgannoù trec'h..

Livit e orañj ar Republikoù-c'hoar hag ar broioù diwall an Impalaeriezh.

An impalaeriezh c'hall a ya ...	Stadoù dindan dalc'h ar familh impalaerel (hini Napoleon) : Republikoù-c'hoar	« broioù diwall » <i>Tiriadoù gwarezet, kontrolet get Frañs</i>	Stadoù kevredet	Stadoù enebour
--Norzh :	-- Rouantelezh Hungaria_____		-- Aostria_____	-- Rouantelezh-Unanet_____
-- Su :	--Rouantelezh Spagn_____	-- Dugelezh Vras Varsovia_____	--Rusia_____	-- Portugal_____
	-- Rouantelezh Napoli_____		--Sweden_____	-- Sardinia_____
	-- Rouantelezh Italia_____	-- Kengevred ar Rhein _____	--Danmark_____	Sikilia
	--Rouantelezh Wesphalie_____	----	--Norvegia_____	



Napoleon a grogas da vrezeliñ en-dro e 1803. War vor e voe diskaret morlu gall get ar Saozon e-tal kab Trafalgar. War zouar avat e voe trec'h an **ARME VEUR** (anv roet da arme Napoleon) war Aostria ha Prusia- Austerlitz(1805) Iena(1806) Wagram(1809).

130 departamant a voe Frañs e 1811 pe voe e barr he beli.

